

HEKLEV SEVENADUREL

	A-dreuz lenn	3
	Petra nevez ?	10
	Kelaouennoù	24
	Notennoù	28

bio
Depuis 30 ans

6 œufs



produit-local.fr
issus de poules nourries
sans OGM (<0.9%)
avec des céréales
100% origine France



FR-BIO-10
Agriculture France

BREIZH' on EGG

poules élevées en plein air

consommer de préférence

avant le :

DL GROS 14/05

libre :

produit-local.fr

Gwenn ha du toull revr ar yer, a-hervez !

Skeudenn bet kaset deomp gant Tudual Huon

Kasit ho skeudennoù deomp : skridou@alliamm.bzh

Herve LATIMIER

**“Il faut dire que les
temps ont changé...”,
Chronique (fiévreuse)
d’une mutation qui
inquiète,
gant Daniel Cohen,
Albin Michel, 2018
234 fajenn, 19€**



Brudet eo Daniel Cohen evel ekonomour. N’eo ket *Il faut dire que les temps ont changé* ul levr ekonomiezh nemetken. Sokiologiezh ha prederiadennoù politikel war efedoù al luskadoù ekonomikel hag an araokadennoù teknel war ar gevredigezh. An digoradur a bouez war ar c’hemmoù c’hoarvezet er bed abaoe un nebeud degadoù a

vloavezhioù : « *D’étranges glissements se sont produits qui nous ont fait passer d’un monde à un autre, totalement étranger à celui qui l’avait enfanté* » (p.11). Goude e kaver teir lodenn en oberenn : *Partir, Revenir ; Les temps dégradés ; Retour vers le futur.*

Kregiñ a ra al lodenn gentañ, tri chabistr enni, gant pre-

deriadennoù war 68 hag ar bloavezhioù da-heul : *Mythologies modernes* hag *Illusions perdues* (1/3). El lodenn-mañ e taolenn Daniel Cohen ar pezh zo bet hervezañ c’hwitadenn ar re o deus klasket « bevañ en un doare disheñvel » ha temptadur ar feulster hag ar muntr evit lod all. Anvet eo an trede chabistr *La révolution conservatrice* : ar bloavezhioù 80, Reagan ha re all, distro ur gapitalouriezh renet gant an arc’hantourion ha distro mennozhioù mirour. Echuiñ a ra ar chabistr gant ur rann anvet *Kondratiev, mon amour* (*Illusions perdues* 2/3). Setu div frazenn ziwezhañ ar rann : « *La restauration promise par la révolution conservatrice pouvait s’entendre comme un retour aux valeurs fondatrices, puritaines, du capitalisme. Elle a fait advenir le contraire : le triomphe de la cupidité* » (p.101).

Les temps dégradés eo titl an eil lodenn. Lañs ar boblelouriezh hag e abegoù a ra danvez pennañ al lodenn.

Er chabistr kentañ, *L’adieu du prolétariat*, e kaver ur sell war emdroadur ar bed en div rann gentañ, gant daveoù dedennus da zielfennadur an hollveliou-

riezh gant Hannah Arendt. Pledañ a ra ar rann ziwezhañ, *Cinquantes ans de solitude* (*Illusions perdues* 3/3), gant Frañs ha kresk levezon an FN. Prederiadennoù zo a c’hellfe sikour da gompren perak ez eus bet eus “emsavadeg ar jiletennoù melen”.

Eil chabistr al lodenn, *La phobie migratoire*, a daolenn c’hoarvoudoù a gaver, siwazh, e kalz broioù. Gellout a ra ar ouenelouriezh en em ziskouez divezh sikouret gant ar frailhoù a gaver er gevredigezh. Echuiñ a ra ar chabistr gant kresk ar feulster ha dielfennadur ar pezh a laka anezhañ da vezañ disheñvel diouzh hini ar bloavezhioù 70. Kentelius eo met n’eo ket sederaus...

Al lodenn ziwezhañ, *Retour vers le futur*, a c’hell seblantout gwellwelusoc’h evel titloù an daou chabistr : *Le Grand espoir du XXI^e siècle* ha *Génération iPhone*.

N’eo ket ken simpl evel-just. Diazezet eo ar chabistr kentañ war efedoù an araokadennoù teknel (niverel, robotoù, naou-egezh artifisiel, binvioù elektronek a bep seurt...). Mont a ra buanoc’h-buanañ ar c’hemmoù gant efedoù war an eko-

miezh met ivez gant hon sell war an denelezh hec'h-unan (mennozhioù treuzdenelour da skouer). An ekonomiezh « a gresk » eus he zu a gas an traoù war hentoù a glot ganti. Forc'hellek eo pep tra eta. « *C'est donc bien l'homme qui est au coeur de la société post-industrielle, mais un homme qui a besoin d'être préalablement numérisé pour étancher la soif inextinguible de croissance des sociétés modernes.* » (p.166)

Internet, *selfie*, iPhone, rouedadoù sokial... Dieubidigezh pe sklavelezh nevez. Riskl da vezañ sorc'hennet gant e “skeudenn”, da vezañ palvatet, manipulet war bep tachenn, an hini bolitikel peurgetket. « *Il semble au contraire que l'effort pour participer au réseau soit l'annonce d'une nouvelle servitude davantage que la promesse d'une libération.* » (p.200) « *Car les réseaux sociaux, contrairement à leur nom, désocialisent les personnes.* » (p.204)

War an dachenn bolitikel ez eo, hervezañ, rummad an iPhone etre diseblanted ha feulster, enep ar gouarnamantoù met o c'houlenn muioc'h diganto. Darempred gant ar skrid o kemm, darempred gant red an amzer

hag an istor ivez. Diktatouriezh an algoritmoù. Bezañ bepred o c'houlenn, o c'hortoz, un nevezenti... (« *le modèle général de la vie quotidienne au XXI^e siècle, c'est l'addiction* », arroudenn tennet eus un destenn gant Jacques-Almain Miller). (p.212). Echuiñ a ra ar chabistr gant ur rann anvet *La vie devant soi* a ro un tamm spi. Ret 'vo stourm enep ar bed a lam diganimp hon fersonelezh. Stourm hiniennel ha stourm a-stroll, adreiñ ur roll d'ar politikerezh ha d'ar sindikadoù. Klask mennozhioù nevez. Reiñ a ra Daniel Cohen arguzennoù mat o vont a-du gant ar c'hounedigezh diazez evit an holl... Dislavarioù spontus a zo : gwelet e vez alies ar bed niverel evel un doare da stourm enep kemm an hin ha koulskoude ez eo unan eus brasañ produer CO2... En tuhont da se pe abalamour da se, klaskomp « mirout un emskiant disuj eus hon ezhommoù gwirion » (p.222).

Er c'hlozadur ec'h adkaver eveljust mennozhioù bet displeget el levr. Echuiñ a ra gant un arroudenn hir eus ur skrid gant Aldo Schiavone. Setu he dibenn : « *Il apparaît de plus en plus nécessaire de trouver*

un point d'équilibre qui, tout en intégrant le lien entre technique et marché, sache se placer en dehors de lui, qui permette d'élaborer ce qui apparaîtra comme un bien commun » (p.230).

Diaes eo reiñ en un nebeud

linennoù un tañva klok eus ul levr ken pinvidik, leun a zaveoù a bouez hag a brederiadennoù dedennus. Ne lammer ket gant levezvez o lenn an oberenn met reiñ a ra un diazevez poellek d'ar preder hag ur c'hoant da cheñch red an traoù. Gellout a reer...

**Constance de Bretagne
(1161-1201), Une
duchesse face à
Richard Coeur de Lion
et Jean-sans-Terre,**

gant Eric Borgnis Desbordes,
Yoran, 2018,
482 bajenn, 25€



Trede levr un heuliad gouestlet da Istor Breizh etre eil lodenn an XII^{vet} kantved ha deroù an XIII^{vet} eo *Constance de Bretagne*. Embannet e voe an oberenn gentañ, *Arthur de Bretagne, L'espoir breton assassiné* (1187-1203), e 2012 (gwelout AL niv. 397, Meurzh-Ebrel 2013, p.92). An eil lodenn, *Pierre Ier de Bretagne (1213-1237) Pierre de Dreux, un Capétien sur le trône ducal* a voe embannet e 2013. Marteze e vo aesoc'h d'al lenner kregiñ gant *Constance*, lenn *Arthur* goude ha *Pierre Ier* evit echuiñ rak gwall luziet

eo Istor Breizh d'ar mare-se. Anat eo e stourm an Dugezed hag an Duged evit mirout gwirioù Breizh enep roue Frañs eus un tu hag "impalaeriezh" ar Plantagenêt eus un tu all. Ar gevredigezh feodel zo mik disheñvel eus hon hini ha diaes eo kompren an doare darempred a zo etre gwaz hag aotrou alies. Darempredoù politikel luziet. Nerzh brezel ar re a glask lakaat o arigrap war Vreizh. An doareoù d'ober : skrapat tud, mirout anezho evel gouestlad (soñjomp e tonkad Alienor a Vreizh, merc'h Konstanza), distruj

kêrioù ha maezioù, lazhañ kantadoù a dud, terriñ e c’her... Setu an endro.

Levezon ar Plantagenêt war Duged Vreizh a weler mat pa redi Herri II Konan IV da zilezel e garg evit ren war-eeun war ar vro betek distagañ kontelezh Naoned (dija !). Dibabet e voe daou bried kentañ Konstanza gantañ. Yann Dizouar a zibabas an trede... Gwelet a reer ivez levezon roue Frañs o kreskiñ adalek ma voe rediet Duged Vreizh da c’houlenn e sikour enep roue Bro-Saoz... Ouzhpenn e tle an Dugez kreñvaat he galloud war noblañsoù bras Breizh, ober gant emzalc’h ar re-mañ a oar cheñch tu pa soñjont ez eo mat evito, ober gant pouez ar Pab hag an Iliz war ar politikerezh en Europa a-bezh... Arabat ankouaat o deus kalz tud eus an noblañs douaroù e Breizh-Veur pe e Frañs ha c’hoant mirout anezho... Duged Vreizh o-unan zo konted Richmond e Bro-Saoz. Pouez al liammoù familh zo bras hag an dizemglevioù er familhoù ken bras all. Seurt dizemglevioù ha c’hoant galloud pep hini o deus diskaret impalaeriezh ar Plantagenêt. Peadra ’vefe da sevel stiradoù tele...

Da vareoù zo em eus kavet

diaes al levrioù da lenn abalamour da fuilhadeg ar fedoù hag an anvioù. N’int ket urzhiet a-walc’h hag ar santimant a vez ur wech an amzer da adlenn traoù bet lennet dija. Skañvoc’h e c’hellfe ar stil bezañ... hep kontañ un toullad mankoù embann evel lakaat Herri II da vervel e 1199 e-lec’h 1189 er c’hlozadur, da skouer... Ne denn ket se talvoudegezh d’al labour. Daveoù e-leizh (en notennoù hag el levrlennadur) titouroù niverus, ha dielfennadurioù dedennus a gaver. Deskiñ a reer kalz.


E-touez an traoù o deus sachet ma evezh : kreñv ha forc’hellek eo roll an Iliz. Pouez mojenn Arzhur a verzer pa ro Konstanza an anv Arzhur d’he mab, pa sach ar Plantagenêt ar vojenn eus o zu o “tizoleiñ bez Arzhur” e Glastonbury e 1191. Kalz eus an noblañsoù bras a vir anvioù brezhonek evel Konan, Herve, Guyomarc’h, Hoel... Pezh a c’hoarvez da gontelezh Naoned a rakskeudenn pezh a ra Frañs bremañ. Ur sell nevez am eus bet war personelezh Richarzh Kalon Leon. Er filmoù e vezer kustum da welout Yann Dizouar evel treitour, fallakr, kriz ha laosk, ha Richarzh hael,

kalonek ha brokus. Ar wirionez a cheñch kalz an traoù. Ma n'eo ket Richarz ken gwazh hag e vreur ez eo feuls, kriz, itriker, sorc'hennet gant ar brezel hag ar galloud. Ar freuz hag ar reuz a lakaas e Breizh e 1196 zo arouezius eus e emzalc'h e-keñver an dugelezh. Pa gomzan eus 1196, e plijfe din

gouzout hiroc'h war emgann Karaez nemet emgann Karnoed e vefe...

An tri levr zo da vezañ lennet eta. Ma vefe tu d'aozañ ul levr berroc'h, sklaeroc'h ha skeudennaouet diwar-benn ar prantad-se eus hon istor e vefe dreist. Un hunvre ?

**Blood in Eden, A Sister
Fidelma Mystery,
gant Peter Tremayne,
Headline, 2019,
333 fajenn, 19,95€**



Tremen a ra istor tregontvet levr avanturioù Fidelma e Cloichín, ur gêriadenn nepell diouzh Caiseal (Cashel) war du menezioù Cnoc Mhaoldomhnaigh. O tistreiñ eus ur veaj emañ Fidelma, c'hoar Colgú, roue Muman, hag Eadulf, he gwaz. O klask ul leti evit an nozvezh emaint. Met devet eo bet an hini a soñj dezho kaout bod ennañ. Setu int o kendel-c'her betek Cloichín. En ur erruout er gêriadenn ez int test dre zegouezh eus linchiñ ur

paourkaezh den eus rummad ar gantreerien. Lakaat a ra Fidelma un harz d'an traoù evel-just ha divizout a ra chom er gêriadenn evit sikour barner al lec'h, Fethmac, da enklask. Deskiñ a ra Fidelma e oa tamallet Celgaire, ar c'hantreer, da vezañ drouklazhet ur familh a-bezh hag e oa annezidi Cloichín o vont d'e grougañ hep an disterañ barnedigezh dindan levezon ur manac'h anvet Gadra. Pinvidik ha peoc'hus ez eo gwelet Cloichín evel heñvel ouzh liorz

Eden. Diskouez a ra an enklask ez eo teñvaloc'h an traoù. Muntrou all, darvoudoù liesseurt hag un tamm dic'hortoz a-wechoù evel donedigezh ur bagad soudarded eus gward Golgú hag a sikour kalz Fidelma a-raok dibenn an enklask ha diskoulm an afer... Unan eus perzhioù dedennus hag un tamm enoeüs marteze ar romant eo an displegadennoù a-zivout lezennoù Iwerzhon e-keñver perc'henniezh ar madoù, an hêrezh ha plas ar merc'hed. Unan eus prezezennoù *Félie Fidelma 2019* (emgav lennerien Fidelma) a blede gant an danvezioù-se... Deskiñ a reer traoù eta, deskiñ a reer traoù diwar-benn roll an den a lezenn en ur gêriadenn


ivez. Unan eus an darvoudoù a ra aergelc'h an istor eo emled levezon sell Roma war ar gristenniezh en Iwerzhon enkorfet e *Blood in Eden* gant Gadra, un doare gourou trelatet a laka an dud da sentiñ eus lezenn an heñvelboan tennet eus an Testamant Kentañ hag o lakaat lezenn an Iliz evel ma wel anezhi a-us da lezennoù Iwerzhon. Daoust ma teu a-benn Fidelma da ziskoulmañ an afer ha da sioulaat an traoù e kredan santout emañ ar bed a anavez-hi o cheñch tammha-tamm ha ket war an tu mat. Da lennerien *Al Liamm* reiñ o soñj goude bezañ lennet *Blood in Eden* gant ar blijadur em eus bet-me o lenn ar romant.

PETRA NEVEZ ?



**Herve LATIMIER,
Magali BARON &
Malo BOUËSSEL du BOURG**

Dre faot Fauré,
gant Yann Gerven,
Al liamm,
258 pajenn, 14€



Ur romant-polis a-feson eo hep mar levr Yann Gerven, gant e steuñvenn gweet-mat a laka ar c'homandant Lionel Turluch da ziskoulmañ afer diankadenn ur plac'h yaouank kenkoulz ha hini un trafikerezh drammoù e Kemper. War un ton skañv ha mibin e vo kaset al lenner eus Skol-vuzik Kemper d'an Oriant, da Langoned, ha goude meur a zistroenn skrijus ma vo dis-

koachet foñs duañ an afer, e chomo sebezet, hep ma vefe kollet penn an neudenn gantañ. Ne vo ket kollet ar mousfent kennebeut, pa c'hoari ar skriva-gner dalc'hmat gant reolennoù ar rumm lennegezh-se : mont a ra betek ijinañ titl ur romant en alamaneg, *Kein Pfannkuchen in Schaffhausen*, a vefe troet *Tamm krampoue'nn e Rosporden...* Evel pa vefe an tamm goaperezh-

se an alan a vefe ret d'ar skrivagner tennañ warnañ evit stagañ gant e levr en un doare digabeatr.

Na titl al levr, nag e c'holo, nag e benn-kentañ ne dennont kement-se d'ur romant-polis : a-drugarez dezhe ec'h eomp tre war-eeun e bed ar sonerezh, hag en em silomp e red trubuilhet soñjoù Herve Volant, ur violloñsellour yaouank, donezonet-mat ha brudet dija, kelenner e Skol-vuzik Kemper. War enkreiz bras emañ hennezh, rediet ma vo da seniñ a-benn nebeut ar c'honcerto a spont anezhañ ar muiañ, hini Lalo, m'en em sant « evel ur c'had o klask tec'het dirak ur vandenn chas o harzhal war he lerc'h ». An digoradur-se, deuet gwall vrav, a ziskouez en un doare kizidik ha gwirion ar gwask a ren deskadurezh ar sonerien yaouank, a c'hell bezañ seizet gant an aon daoust d'o barregezh. E-pad m'emañ e soñjoù o kantren emañ Herve Volant ivez o vale dre ar straeoù, ken na vez kollet e hent gantañ. A-drugarez da se e ra anaoudegezh gant Clara, studie-rez war ar piano, a ouio, gant he c'hwezek vloaz, seniñ Fauré gantañ ha dont war e sikour evit ma vo trec'h war e aon. Setu

kinniget, *in medias res*, an div dudenn bouezusañ.

Unan eus mennozhioù gwellañ al levr eo ober eus un den ken disoñj, ken dinoaz ha didro hag Herve Volant, tudenn bennañ ur romant-polis. Evel ur gwir vanac'h e vev, gouestlet d'ar sonerezh hepken, gouest da bleustriñ eurvezhioù-pad en e garr-tan, pe da ankounac'haat e zeiz-ha-bloaz dezhañ e-unan – pas hini Moussorgski avat. Koulskoude en em gav e-kreiz an enklask, diskred warnañ. A-feur ma strisha ar c'helc'h en-dro dezhañ e teu ar gwir c'houlenn da vezañ : piv zo oc'h antellañ ar griped-se dezhañ, ha perak ? A-benn ar fin, hag en desped dezhañ, e vo dirouestlet an istor a-drugarez dezhañ.

Dibab metoù ar sonerezh evel framm an enklask a ro tro d'al lenner d'ober anaoudegezh gant tonioù eus renabl klasel, ha da gemer perzh e trivliadoù an tudennoù o seniñ. Met un digarez eo dreist-holl evit sevel un daolenn didruez eus ar familhoù bras ha cheuc'h a laka o bugale er Skol-vuzik. Kenderc'hel a ra Yann Gerven da zispenn diavaezioù kaer ar metoù pinvidik-se, ma chom digastiz torfedoù an dud ha direbech o brud. Un

doare saourus en deus kavet d'en ober, da skouer pa vez deskrivet merc'h un amiral o seniñ violoñs hep tamm kalon ebet na kizidigezh. E lec'h all ebet marteze ne c'hellfe bezañ diskuliet gwelloc'h pilpouse-rezh ar pennoù-bras.

Un tamm hiroc'h eo ar romant-se evit romantoù-polis all Yann Gerven, seul welloc'h. Rak kemer a ra e amzer evit mont tre e ene e dudennou, seul vui ma kont an darvoudoù eus an diabarzh : er chabistr kentañ e choaz savboent Herve Volant, a-raok cheñch savboent meur a wech e-kerzh al levr. Dreveziñ a ra kildroennoù soñjoù ankeniet Herve Volant a-hed e gofezadur kentañ, ha, da-c'houde, stil dilu, blim ha desket Clara Kerloc'h, pe goulennou nec'het ar c'hommandant Lionel Turluch, lakaet diaes gant an enklask. Santet e vez ur gwir deneridigezh eus perzh an oberer e-keñver e dudennou, ha pa ne virfe ket ouzh un tamm goaperezh war o divout.

A-fet yezh ne ziskrog ket ar skrivagner diouzh ar choaz lennegel en deus graet a-viskoazh : chom an tostañ posupl d'ar yezh komzet, o treveziñ en un doare ampart he lusk, he zroiennoù

saourus, betek disterañ perzhioù ar rannyezhoù. Da skouer e laka tud eus Langoned ha Gourin da gomz : « Ec'h on é paouez kaout ur vizit ». Mousc'hoarzhin a reer o vezañ splujet en ur brezhonég bev, o teskiñ troioù-lavar, o vezañ kaset gant red prim ha birvidik e bluenn. Evit ar yezh bezañ disi e seblant avat chom kuit a varzhoniezh hag a wir perzhioù lennegel. A-wechoù en em c'houlenner hag a-walc'h e vez, evit skrivañ lennegezh, doujañ d'ar yezh komzet en he live pemdeziek, hep na vefe roet dezhi en-dro na kened, na donder, nag ar meleour a wirionez a c'hell un oberenn arz astenn d'hor bed.

Ne c'heller ket bezañ enoet o lenn al levr-se ; un tamm hegazet pe dipitet, ne lavaran ket. Rak ne baouez ket an daneveller da deurel bommoù farsus, daveoù kuzh, fentigelloù damlavaret na vezont ket displeget. Gwir eo e klask ar stil “soñjal brezhonek” en doare strishañ ma c'hell, kuit a ginkladurioù na dennfent ket da yezh ar bobl. Seul souezhusoc'h e vez ar santimant e klask ar romant digarezioù da glakenniñ diwar daveoù a bep seurt, e latin, ruseg, gregach pe kembraeg. Dont a ra da soñj d'al


lenner eus ar goulenn-se : da betra e servij skrivañ lennegezh, ma ne vez ket da zigeriñ ur bed, un doare da santout, ma ne laosk ket plas da didrouz ar galon ? En em c'houlenn a reer hag-eñ e klask an daneveller amprouiñ gouiziegezh al lenner, pe abañiñ anezhañ, pe en em santout evel unan eus an dud barrek war sevenadur ar vegenn ; met ar re-se ne zeskont seurt, ar re all kennebeut.

E-giz-se ec'h a ar skrivagner ouzh e dudennou, pa soñjer mat : gant estlamm pa ouzont diouzh traoù dic'horthoz (ar vrigadieres Audrey Bassompierre, gouest da c'houlenn « Prélude ha Fuga ? » a-zivout diankadenn ur plac'h yaouank) ; gant goape-

rezh pa ne gomprenont ket (ar paourkaezh rener lise, dianav Rostropovitch dezhañ). En amzivin e chomer dirak ur youl ken kreñv da ziskouez gouiziegezh diwar-c'horre, pa vefe danvez ha kizidigezh a-walc'h evit mont donoc'h. A-zivout an tudennou dreist-donezonet war danvezioù a bep seurt, kement hag a-zivout ar skrivagner, en em c'houlenner a-wechoù hag-eñ n'emaint ket o kuzhat a-dreñv o barregezhioù. Dre chañs e roont ivez peadra da vroudañ empatiezh al lenner, ken na vez maget evezh ha plijadur betek an diskoulm.

MB

Koroll an dasorc'h,
gant Fulup Lannuzel,
Al Liamm,
216 pajenn, 12€



Kinnig a ra Fulup Lannuzel deomp un dastumad danevelloù eus ar choaz, kizellet a-fet yezh kenkoulz ha pinvidik a-fet

danvez. Prantadoù resis eus istor Breizh en deus bet c'hoant da adsevel, eus Senechaliezh Gwened, dindan ar Renad kozh,

betek ar bloavezh 2027 en amzer da zont. Oc'h ergerzhout an amzer e laka da santout an donder istorel a ra e annez e buhez Mab-den, seul greñvoc'h marteze ma tosta ouzh hon amzer. Etretant en deus gouestlet e-kreiz al levr peder danevell d'an eil brezel bed, d'ar c'hêrioù, d'ar c'horfoù ha d'an eneoù dismantret, d'ar familhoù rannet gant an dibaboù a oa d'ober (*An daou vreur*).

Met e-kerzh ar pajennoù teñvalañ zoken, daoust d'ar from, e chom avizet-mat sell an aozer war an istor, kuit a varnadennoù prim, o klask kompren, diskouez, deskiñ. Rak da gentañ e kinnig ar skrivagner ul labour diazezet war ur ouiziegezh ledan ha don. Diskouez a ra micherioù, lec'hioù, teknikoù, dielloù istorel, mennozhioù o tont war-wel, en ur dennañ gounid eus e skiant-prenet evel adeiladour, met ivez eus kement tachenn e vez dedennet ganti en un doare gwirion. Da skouer, en danevell *Brest sezizet* e vez adsavet dre ar munud ur c'harter eus ar gêr da vare he distruj, tra m'en em zifret an Difenn Enep-bombes da dalañ ouzh an tangwallioù ha da saveteiñ buhezioù. Evel amatour jazz e teskriv

e *Koroll an dasorc'h* ar seurt sonerezh diroll ha digabestr degaset gant ar soudarded du lezanvet "Harlem Hellfighters".

Ar yezh a servij diouzh ar gwellañ entan an oberour evit an istor. Ar yezh pinvidik ha desket-se, ma vez dibabet pep ger gant aked, a chom skañv, glan ha sklaer, dre ma ne glasket en em lakaat war-raok ; ar frazennoù a red, berr, flour ha gwevn o lusk. Seul binvidikoc'h e teu ar skrivañ da vezañ ma ne zouj ket ober gant gerioù resis, tennet eus geriaoueg ar medisinerezh, ar fizik pe al livouriezh, ha pa vefent arnevez. Gant rat vat e vezont implijet, ha dre zoujañs ouzh al lenner e vezont displeget e fin al levr. Marteze n'eo ket perzh gwellañ ar yezh-se an doare da lakaat an tudennoù da gomz, na d'ober d'al lenner santout e vezont dirazañ kig ha gwad. Met en e jeu emañ an aozer pa chom a-sav evit arvestiñ ouzh aergelc'h an dremmvro, ouzh un delwenn pe ur pont kozh, ouzh ar gouloù o c'hoari war an traoù : « Didrouz an aer bremañ, un damskleur en oabl ma teraoue ar stered da flamminañ ». Leun a sklaerder hag a zidrouz eo ar yezh-se, ha

gouzout a oar tevel tra ma tres ar bed.

Gant linennoù sklaer ez eo treset ivez steuñvenn pep danevell, o kenweañ meur a neudenn a ro pep a berspektivenn war ur prantad. *Marc'heien Porstrein* da skouer a gont pare kevrinus Jacques Méheust, livour kefridiel ar Morlu ; tro d'an aozer da zeskrivañ greantelaat porzh Brest e-kreiz an XIX^{vet} kantved, met ivez skiant al louzaouiñ evel ma vez embreget gant un diskonterez e Koad-ar-C'hrannoù. A-drugarez da vuhez an den-se e vez diskouezet emdroadur buan dremm ar c'hêrioù, kenkoulz hag ar medisinezhez kozh o padout war ar maez ; tra ma vez sell al livourien o kemmañ ivez, o leuskel al livioù hag an trivliadoù da zont tre en daolenn evel ma tizhont al lagad hag an ene. Ma seblant ar gwirvoud ober diouer d'an tudennoù a-wechoù, e vez santet mat ez eo an donder istorel-se an hini ac'h a d'ober o c'horf ha skoulm o buhez.

An nav danevell-se zo liammet an eil re ouzh ar re all gant bezañ iskis ar bed-hont o tifoupañ e-kreiz ar bed-mañ. Santet e vez dalc'hmat danvez ar mojennoù kelt o vorediñ din-


dan pluenn ar skrivagner, hag o tihuniñ a-greiz-holl, pa vefe un diouganer o lenn er stered (*E kavandenn ar roue Stevan*) pe, en amzer a-vremañ, skoilhòu dic'hortoz o lakaat an adeiladourien diaes e-pad ma savont ar fungarr e Brest (*Ar fungarr*). Seul ankeniusoc'h e vez levezon an nerzhioù dreistnaturel ma teuont tre en ur bed boas, anavezet mat, doñvaet gant an teknikoù. Se zo kaoz e c'heller bezañ fromet en un doare dibar gant an danevell *Ar pennoù troc'het*, ma vez degaset an elfenn annezhek gant labour ijin un arzour o kizellañ delwennoù nevez evit porched Iliz Karaez. Sebezet e chom al lenner o welet ganedigezh ur boud-maen, disneuz hag euzhus e zremm, a denn d'an arz-pobl breizhek kenkoulz ha da levezonioù estren, ha da hengoun an Iliz kenkoulz ha da vojennoù pagan. Ganet diwar ur ouiziegezh ledan ha diwar meur a levezon eo an delwenn-se ; bev, fetis ha dibar e chom he bezañ avat, hag a-walc'h ez eo evit ober eus kement darvoud ur seblant nec'hus ha galloudus. E-giz-se emañ ivez gant al levr-se, ganet diwar ul labour istorel don, o tihuniñ el lenner ar blijadur

d'ober anaoudegezh gant lec'hioù, prantadoù, arzourien, hep na vefe mouget buhez an traoù gant pouez an displegadennoù. An danevelloù-se a laka hor bed modern da vezañ

spinet ur predig-pad gant barzhoniezh ha donder an amzer dremenet, hep klask diskoulmañ ar gridienn hag ar goulennoù en deus laosket war e lerc'h.

MB

**Klask,
Levrenn 12
Pennadoù dastumet
dindan renerezh
Erwan Hupel,
TIR,
141 bajenn, 10,50€**



Kavet e vo boued spered liesseurt e daouzekvet levrenn *Klask*. Fardet eo bet gant doktored, danvez doktored, ha danvez mistri, eus *Kreizenn an Enklaskoù Breizhek ha Keltiek* e Roazhon. Eizh pennad a zo bet dibabet gant Erwan Hupel evit an embannadur-se, kement ha reiñ un alberz diskouezus, defot bezañ klok, eus an danvezioù eo bet ar glaskerien o pleustriñ warno abaoe daou vloaz : sokio-yezhoniezh, pedagogiezh, yezhoniezh, lennegezh, antropologiezh. Studiet e vo keal an darempredoù etre broadelouriezh sevenadurel ha politikel en Israel, diwar skridoù bet emban-


net war *Al Liamm* e 1954. Danvez zo er pennad pouezus-se, a bled gant goulennoù diazeze ha n'int ket diamzeret. Lakaet e vo war-wel skeudenn fall ar gemenerien en hon lennegezh bobl. Renablet e vo anvioù-lec'h-mor Edig, a-raok na vefent kaset en o bez gant ar vrezhonegerien gozh. Dielfennet e vo korpus dezrevelladoù bugale pemp bloaz en hentennoù divyezhek kement ha prizañ o live yezh. Adkavet e vo labour enklask Denez Pichon diwarbenn plas ha levezon indentelezh Breizh hag ar brezhoneg e strategiezh an embregerezhioù. Keñveriet e vo an difazierioù a

gaver enlinenn bremañ. Hag erfin e vo taolet ur sell war istor ar magourioù brezhonek a weler oc'h en em staliañ tamm-ha-tamm e Breizh. Ar re o defe aon

rak ar skridoù skolveuriek, abalamour d'ar sec'h ha d'ar borodus ma vezont alies, a vo paket war o fazi a wech-mañ !

MBdB

**Les bretonnismes,
A vous de jouer !
Deoc'h da c'hoari !,**
gant Klervi Abalain
hag Hervé Lossec
Skol Vreizh,
84 fajenn hag ur
c'hoari seizh familh, 20€




Hag adarre ? Ya, met disheñvel mat an danvez hag ar pal. Diwar c'hoari, deskiñ... Ar wech-mañ e vo lakaet al lennerien da c'hoari gant ar pezh o deus desket. Gant Klervi Abalain ez eus bet ijinet ur c'hoari seizh familh fentus a-walc'h, gerioù kroaz ha charadennoù, ha zoken un « istor ez oc'h an haroz anezhañ », kement ha lakaat ac'hanoc'h da bleustriñ da vat ! E lodenn gentañ al levr en deus roet Herve Lossec displegadurioù diwar-benn ar c'hoarioù gwellañ-karet gant Breizhiz. Berzh-bras a ra ar bouloù-pok evel-just, met ar c'hoari domino eo an tad ! Goude bezañ roet reolennoù diazez hag endro sokial kement c'hoari zo, gant forzh hanezennoù, e kinnig

Herve Lossec ur c'heriaoueg verr, deoc'h da dremen hep bezañ gwerzhnet e brezhoneg. Biken ne chomoc'h boud ma rit diouzh e guzulioù mat.

Hegazet e vo lod tud moarvat, gant astenn difin neudenn ar “brezhonekadurioù”. Daoust ha n'int ket deuet da vezañ ur merk kenwerzhel, hepmuiken ? Techet on-me da grediñ e talvez ar boan tennañ splot eus brud ar *bretonnismes* evit mont un tamm donoc'h er yezh, evel m'omp pedet d'ober gant an trede opusse, en ur chom feal d'al linenn boblel rik bet dibabet abaoe ar penn kentañ. Emichañs e vo kaset brezhonegerien ouzhpenn da Roma dre an hent louarn-se.

MBdB

**Remont Delaporte,
Reun Ar C'halan,
Div blanedenn,
kinniget gant Charlie Grall
Embannadurioù Al lanv,
212 pajenn, 12,50€**



Un stumm divoutin en deus roet Charlie Grall d'an destenn emañ o paouez embann : *Remont Delaporte, Reun ar C'halan, div blanedenn*. Savet en deus e levr o lakaat keñver-ha-keñver skrid-buhez Delaporte (1907-1990) hag hini Reun ar C'halan (1923-2017), daou Vreizhad eus ar C'hastell-Nevez hag o deus bet div blanedenn gwall zisheñvel daoust dezho bezañ ganet er memes kanton, d'ur mare ma veze ar brezhoneg yezh ar pemdez evit ar muiañ niver.

Stourmet en deus Delaporte evit Breizh, war an dachenn, a-hed e vuhez : anvet e voe e penn *Strollad Vroadel Vreizh*, kas a reas en-dro *Breuriez ar Brezoneg er Skolioù*, diaraoger *Diwan*, labourat a reas evit peur-unvaniñ reizhskrivadur ar brezhoneg. Ar pennad gouestlet d'ar reizhskrivadur, just a-walc'h, a zo eus an dedennusañ. Remont Delaporte a laka

anat ne oa ket entanet Roparz Hemon gant ar peurunvan, pell ac'hano. Ha n'eo ket diwar e intrudu na war urzh an Alamaned an hini eo bet divizet unvaniñ an doareoù skrivañ e Breizh, daoust d'al lizhiri a skrivas Roparz Hemon da vMordiern evit en em zigareziñ. Sklaer eo arguzennoù Delaporte war-se. Dre unaniñ ar reizhskrivadurioù e veze lakaet un termen d'un abeg a gave ar Stad c'hall a-enep ar c'helenn brezhoneg : « N'heller ket kelenn ur yezh n'eus ket anezhi da vat. N'eo ket posupl da skrivañ zoken ». Remont Delaporte a strivas c'hoazh evit broudañ an dud a iliz war hent ar brezhoneg : « Ne damallan ket d'ar veleien mont da-heul an divrezhonekaat, tamal a ran dezho mont a-raok », a skrive d'e eskob.

Evit kelo Reun ar C'halan, e oa mab ul labourer-douar, gwall baour anezhañ, hag a zivroas

d'ar Stadoù-Unanet war-lerc'h e vara. Studioù a reas Reun e Roazhon, hag e fin ar brezel ez eas da gaout paotred ar strouezh e Sant-Wazeg. E dammig treuz micherel a reas er Stadoù-Unanet avat, ma voe kelenner Skol-veur war al lennegezh c'hall. War an diwezhadoù e teuas dezhañ e emskiant breizhat, pa varvas e dad, ha kregiñ a reas da studial e yezh vamm a-zevri ha da sevel skridoù brezhonek talvoudus : barzhonegoù, danevelloù, studiadennoù...

Charlie Grall en deus graet ur seurt pegadenn diwar vuhez ha diwar sell an daou benndense, hag o deus kavet pep a zoare da servijout o bro. Degas a ra displegadurioù ouzhpenn, diouzh e bluenn dezhañ, pa vez ret. Lodenn Remont Delaporte a zo kalz hiroc'h eget hini Reun ar C'halan, ha kalz pinvidikoc'h e-keñver istor an *Emsav*. Mennozhioù don a vez displeget e skrid Delaporte, a-zivout ar stourm politikel e Breizh a-raok, e-pad ha war-lerc'h an eil brezel bed, a zo bet ur gwiridig e meur a geñver. Kompren a reer pegen liesseurt e oa an dibaboù d'an ampoent. Tabutoù fonnus a voe diwar-benn ar vroadelouriezh, arrannvroelouriezh, ar gevreade-

lezh. Kompren mat a reer ne oa ket eus kement emsaver a oa ur « c'holabo, mat da lao ». Ne veze ket anv er mare-se eus pen-naenn ar c'housezadelezh, met sklaer eo o dije klotet mat mennozhioù Delaporte gant ar c'heal-se. Ne grede ket-eñ e c'hellfe ur strollad politikel bezañ trec'h hep skoazell ar bobl hag hep youl ar bobl. Ne grede tamm ebet, a-enep da vMordrel ha Lainé, e vije bet roet he frankiz da Vreizh gant an Alamaned, goude ma vijent bet trec'h : « Ar frankiz n'eo ket un dra a c'hell ur boblad resev evel ur prof ». Kudenn vrasañ Breizh, a soñje dezhañ, a oa an difoutre ma oa ar Vretoned evit o bro. « Pouezañ a ran war gement-se dre ma kav din e veze – hag e vez c'hoazh – gwanded mennozhioù broadel ar Vretoned hag, evit gwir, o digasted e-keñver o bro, hag a zo brasañ skoilh a gav an *Emsav* war e hent ». Kemend-all a c'hellfemp lavarout hiziv an deiz, 'm eus aon. N'eo ket gant tud klouar e cheñcher penn d'an avel.

MBdB

'Veze ket dañset plinn !,
gant Jorj Cadoudal,
An Alarc'h embannadurioù,
188 pajenn, 10€



Komzoù bev Jorj Cadoudal, bet enrollet gant Gege Gwenn e 2017, a ya d'ober danvez *'Veze ket dañset plinn !* Gant tri maen-bonn e vez heñchet al lenner a-dreuz lenn : da gentañ, an den e-unan, gant e bersonelezh kreñv. Ur penn breton penn-kil-ha-troad, hag en deus enoret e anv-tiegezh ! Ur stourmer tomm e galon ouzh e vro. Unan ha na lamm ket rak e skeud hag a oar kas e raktresoù da benn vat : « Lavaret zo un dra hag ober eo ar gwellañ ! ». Ne sav ket hiraezh ganin d'an amzer gozh. Keuz war-lerc'h... Met da seurt tud divrall o youl, ne lavaran ket avat. Ken rouez eo al largentez-se bremañ.


An eil maen-bonn eo istor ar sonerezh hag an dañs e Breizh. Gant testeni Jorj Cadoudal e tesker dre ar munud penaos ha gant piv e oa bet roet lañs d'an dañs ha d'ar sonerezh hengounel e Breizh goude an eil brezel bed, pa oa tonket d'ar "c'hozha-

joù-se" da vezañ kaset d'ar blo-toù. Eno e vez galvet da goun ur bern tud anavezet pe anaveze-toc'h : Galbrun, Montjarret, Le Voyer, Fulup, Rivoallan, Roparz, Savina, Bouillé, Perrot, Martray, Priel, Mazeas, Guilloux, Ollivro ha betek Le Corbusier ! Penndu-dennou ar sonerezh, an dañs ha buhez an tiriad dre vras Un tammig foutouilhek ha stambouc'hus e teu an danevell da vezañ gwezh ha gwezh all, evit al lennerien n'o defe ket bevet er mare-se. Alese pinvidigezh an testeni istorel, moarvat.

An trede maen-bonn eo an Istor. Ar prantad istor dibar-se m'eo bet cheñchet ken don ar vuhez e Breizh e-keñver sevenadur hag e-keñver armerzh : « Deroù ar festoù-noz hag ar sevel yer ». Meurgan al labourdouar giz nevez. Gwellañ ha gwashañ tra. Produiñ, modernaat ha saotrañ.

MBdB

**Ces saints qui forgèrent
la Bretagne,**
gant Thierry Jigourel,
skeudennoù gant Robert
Micheau-Vernez,
Yoran Embanner,
96 pajenn, 18€



Evel 'm eus lennet en un
atersadenn er gelaouenn *Le Tré-
gor* (niv. 1858, 8-14 a viz Eost)
e lavar Thierry Jigourel n'eo ket
bet goulennet digant un arzour
skeudennaouiñ un destenn met,
evit ur wech, ez eo bet savet an
destenn adalek ar skeudennoù.
Ezel 'oa Robert Micheau-Vernez
(1907-1989) eus ar *Seiz Breur*.
Liesseurt eo e oberenn (un
nebeud taolennoù hag oberen-
noù all a c'heller gwelout el
levr). Ur sell ispisial en deus bet
war ar sent taolennet gantañ
evel ma vijent bugale. Krouet
'oa bet ar skeudennoù e 1943.
Embannet 'oant bet en ul levr
anvet *Le Paradis breton* skrivet
gant Janig Corlay e 1951.
C'hoant he deus bet ar gevred-
digezh *Robert Micheau-Vernez*,
renet gant e vab Mikaël, gwelout
anezho adembannet. Goulennet
eo bet digant Thierry Jigourel
sevel testennoù evit mont gant
an tresadennoù eta...

Savet en deus Thierry Jigou-
rel e destennoù adalek ar mojen-
noù, skridoù Albert Le Grand ha
Buhez ar Sent. Arabat klask ar
“wirionez istorel” enno eta.

Kavout a reer en oberenn
skeudennoù eus delwennoù
Traoñienn ar Sent ivez hag ur
pennad war he divout ha war
hini an *Tro Breiz*. Ouzhpenn ez
eus ur rakskrid gant Philippe
Abjean, daou bennad digeriñ
gant Thierry Jigourel ha testen-
noù kantikoù anavezet.

Evel alies el levrioù emban-
net gantañ e lak Yoran ur skrid
bihan diwar e bluenn. Diskouez
a ra amañ e fulor a-enep an Iliz
Katolik a zistumm testennoù ar
c'hantikoù kozh (hini *Saint
Anne, ô bonne mère* peurgetket)
evit tennañ diganto o zu brei-
zhat. Souezhus eo an titl, *Les
hussards de la république
sévièrent toujours...* Betek-gou-
zout ne oa ket beleien a-vilvern
e-touez ar re-se. Daoust da bep

tra emañ ar gwir gantañ : perak ober eus Santez Anna patronez Breizh ha mirout outi da vagañ ur garantez ispisial (« *Et bénis tes bretons !* ») evit ar Vretoned ha karout an holl dud war memes tro ?

Zoken en ul levr skeudennaouet brav-kenañ ez eo diaes da Yoran chom hep lezel fazioù

**Lettre à ceux
qui ont renoncé
à la Bretagne,**
gant Yvon Ollivier,
Le Temps Editeur,
126 pajenn, 9,50€

Netra nevez e *Lettre à ceux qui ont renoncé à la Bretagne*. Dedennus eo preder Yvon Ollivier evit an eskemmoù mennozhioù. Siwazh em eus ar santi-mant e adlavar memes tra eus un eil levr d'egile. Skuizhus eo adkavout bep tro daveoù da albac'hennoù un nebeud tud diazezet war traoù faos. N'eo ket dreist stad Korsika daoust d'ur statud ispisial ha da zilen-nidi emrener pe dizalc'her, n'eo ket dreist stad Elzas bet beuzet

embanner eus ar c'hwekañ. Pa vioc'h o lenn al levr, kit d'ar bajenn 24 hag e weloc'h kompagnuned Brendan kas ul leti hezoug (*hôtel portatif*) war gein ar valum kemeret ganto evit un enezenn, e-lec'h un aoter (*autel*). Pebezh burzhud !

HL



en ur “rannvro” divent, n'eo ket ar rannvro a gas an traoù war-raok en Iparralde met an dud o-unan... Politikerezh ar sifroù n'eo ket an hent gwellañ. N'emañ ket a-du gant teirye-zhegezh an darn vrasañ eus izili *Diwan* ha *Divyez*h...

An dibab da skeiñ da gentañ war dilennidi ar C'huzul Rannvro, *Ofis Publik ar Brezhoneg*, *Kuzul Sevenadurel Breizh* ha *Kevre Breizh* ha da zidamall ar Stad en un doare war memes tro

a zo souezhus. Hadañ an disrann ne laka ket an traoù da vont war-raok. Ret 'vefe chom hep delc'her kont eus framm lezennel Frañs ? Buan e vefe lakaet un harz d'an traoù... Hep na glemmfe kalz ar Vretoned. N'emaomp ket e Katalonia.

Lâret « d'hon dilennidi » reiñ o dilez war digarez int treitourien ? Daou respont a zeufe diouzhtu : morse n'hon eus difennet mennozh an emrenerezh ha dilennet omp bet gant ar bobl. Nouspet gwech em eus lennet *nos élus* el levr. Dilennidi piv ? An emsaverien ? N'eus tost hini 'bet. Ar brasañ niver ? N'eus ket kalz a emrenerien en e douez...

Perak ne vefe ket kinniget d'ar varnerien pe d'ar gargidi a labour evit ar Stad reiñ o dilez ivez ? Perak ne vefe ket tamallet d'ar re a zifenn ar brezhoneg chom hep ober gantañ ha kavout bep tro digarezioù. Ha n'eo ket ar Stad a vir outo d'en ober, betegoût.

Ar sell tamaller ha negativel ne zegaso netra. Pelec'h emañ ar c'hinnigoù fetis ? Ar gwellañ stumm da lakaat ar gwask war an ensavadurioù a zo bezañ dilennet (evel e Korsika).

Penaos kendrec'hiñ hon fobl ? Pelec'h emañ ar galv da

emezellañ er strolladoù politikel ha da vont war ar renk ?

Kavet em eus iskis al lodenn anvet *Une sphère publique omniprésente* pa ouzer pegen pouezus e oa ar servijoù publik evit an dud hag ar re vunut peurgetket. Ne 'm eus ket lennet kalz tra war an dibaboù ekonomikel hag ekologel. Un doare "Na ruz na gwenn" giz nevez ? Dasorc'hidigezh ar CELIB hep ar sindikadoù na weler meneget neblec'h.

N'eo ket sklaer tamm ebet ar c'hinnigoù. Lâret a ra Yvon e-unan « *Mes propos peuvent sembler durs, sans doute, injustes dans leur généralité – derrière "les élus" se cachent tellement de réalités distinctes – erronés même parfois* ». [Un evezhiadennig : *nos élus* a zo deut da vezañ *les élus*] Gwir. Ma 'm eus soñj mat e lâre an ao. de Talleyrand-Périgord : « *Tout ce qui est excessif est insignifiant* ». N'in ket ken pelloc'h ganti rak mat eo degas danvez tabut ("breutadenn" a vefe un tamm goular amañ) war dachennoù ken pouezus ha saviad Breizh. Gant ma vroudo d'ober un dra bennak estreget klemm.

HL

KELAOUENNOÙ



**Jerom OLIVRY &
Tudual HUON**

diroll. Lakaet eo broioù reter Europa war-wel en teuliad-mañ met daoust da se e weler a-walc’h penaos eo digoretoc’h spered seurt pobloù evit m’eo hini Bro-C’hall, bro nemeti oc’h embann n’eus ket anezhe ezofisiel, unan hag unanet ar vro...

En e gronikenn *N’eus netra skianteloc’h !* e skriv Tangi Legavre ul *Lizher da Vamm Natur* evit goulenn ma vefe kemmet traoù zo ennomp, deomp da dizhout stad an “Dreuzdenelouriezh”. Sed aze ma n’eo ket ken faltazius evit ar pezh a c’hallfemp soñjal !

El lodenn *Bremañ er bed* ez eus kaoz eus Amazonia. An tanoù-gwall divent o deus lakaet war-wel ar c’hudennoù a

> Bremañ (428)

Warlene e oa bet lidet kantvet deiz-ha-bloaz fin ar brezel bed kentañ e kazi pep bro eus Europa. Un doare da gaout soñj eo evel-just, met pouezus eo lenn teuliad niverenn 428 **Bremañ** pa vez kaoz eus ar bloavezhioù da-heul. Kemmet a galz e oa bet hor c’hevandir ha gwallgaset, pe get, ar pobloù lakaet da vinorelezhioù en ur bed o treiñ war-zu ar bedeladur

vez ingal koulskoude er c'hornbro-se. Tud all, avat, a breder. Penaos lakaat da glotañ hor c'hoant da saveteiñ hor blanedenn gant hini an ekonomiezh ? Soñjal war hir dermen kentoc'h evit war berr dermen hag e teu splann mennozhioù deuet eus hon hendadoù a veve eno a-raok mont da get pe dost.

Abaoe pemp kantved e vez kaoz eus Leonardo da Vinci, arzour, livour, skrivagner, skiantour, ijinour ha me 'oar-me c'hoazh. Kavout a ra mat e plas el lodenn *Anavezout ar bed* pa n'eo ket echu gant Mab-den bamiñ dirak e labour divent, o kavout c'hoazh hirie an deiz tud evit klask lakaat e ijinadennoù da wir !

Dedennus-kenañ eo pennad ar pajennoù *Broioù & pobloù*. Ne vez ket kaozet kalz er c'hentelioù Istor eus perzh Bro-C'hall er brezel er Viet Nam. A boan ma vez klevet komz eus emgann Diên Biên Phu, unan eus an emgannoù diwezhañ a-raok ma anzavfe Bro-C'hall bezañ trec'het ha kuitaat norzh ar vro da vat, goude Emglevioù Jenova (1954).

El lodenn *Bremañ e Breizh* e lenner ur pennad diwar-benn pouez ar maen-greun e Breizh,

dre daou raktres savet e 2008 ha 2018 : Kounlec'h Nevenoe e Baen-Ballon (e-kichen Redon) ha Traoñienn ar Sent e Karnoed.

Bevañ e Breizh a reomp-ni. Ha piv, sot-pitilh gant al levrioù, n'en/he deus ket klevet komz eus Begerel, "Kêr al levrioù" e Bro-Roazhon, pe aet du-se en ur seurt pirc'hirinaj zoken ? Ma 'z eo anavezet mat ar gêr-se evit he stalioù-levrioù niverus, n'eo ket anavezet kement hec'h istor dibar !

El lodenn *Sonerezh, sinema, c'hoarioù* e vez kaoz eus un diviz a oa bet dalc'het e-pad Gouel ar Filmoù e Douarnenez, ma vez roet ur plas bras d'ar brezhoneg a-drugarez da youl an aozourien. An tem a oa : « Perak seveniñ filmoù brezhonek e 2019 ? Penaos krouiñ e brezhoneg ? ». Sed aze ma vez lennet un diverrañ hag ar res-pontoù roet da-heul e-kerzh an diviz a c'haller adkavout e rentañ-kont war lec'hienn *Daoulagad Breizh*. Goude ar pennad-mañ e kaver unan all diwar-benn ar strollad Fleuves. Kroget o doa en ur seniñ er festoù-noz evit tizhout ouzhpenn leurennoù mil anavezet evel Les Transmusicales, Jazz à Vienne, pe

c'hoazh An Erer Kozh. Soñj en do ur rummad tud eus Ar Re Yaouank, pignet war leurennoù sonadegoù gant o zonioù gavo-tenn pe plinn, liv ar rock gante. Plas, bremañ, d'ar sonioù elektronek 'ta !

> Pobl Vreizh (671)



Bolivia : ur riez liesvroad en arvar, sed ar pennad kentañ savet gant Paol ar Meur, a c'heller lenn e lodenn vrezhonek ar gelaouenn. Eva Morales, an henvroad kentañ e penn ar riez, en deus ranket reiñ e zilez ha koulskoude e oa bet efedus an dibaboù bet graet gantañ war an dachenn ekonomikel ha sokial. Rebechet ez eus bet outañ bezañ

E fin an niverenn e kaver evel kustum al lodenn *Levrioù, arzoù, embann* hag ar rekipecoù lipous da fardañ aes er gêr.

JO

aet re bell war tachenn al liesvroadelezh dreist-holl gant ar re a oa ezel eus an ilizoù avie-lour o tont eus ar Stadoù-Unanet ha kreñv eo an tu dehoù pellañ en izeldirioù (kalz pinvidikoc'h eget an uheldirioù). Kerkent a skarzhet kuit ar prezidant Morales e oa bet tennet kuit banniel seizh liv an henvroidi diwar savadurioù ar riez.

War niverenn 670 **Pobl Vreizh** e oa bet ur pennad diwar ar Bhoutan hag ar stourm renet evit difenn yezhoù ar vro. En dro-mañ e tispleger deomp penaos e ra ar BDD (*Bodad Diorren an Dzonc'heg*) evit stourm ouzh ar saozneg o ren ar c'hoari war ar genrouedad. Ur stourm diaes da gas da bennvad pa 'z eus 24 yezh er Bhoutan. Yezh vroadel nemeti ar Bouthan eo an dzonc'heg met gwarezet eo ar yezhoù all gant bonreizh ar vro.

Clyde Dlugy-Belmont a lak ar gaoz war labour ar renerien-

skol e Frañs. Christine Renon, ur renerez-skol he doa skrivet ul lizher ma tisplege ar wask spon-tus a oa warni a-raok en em zistruj e miz Gwengolo ar bloaz-mañ. Ar wask a zo ken bras all ha marteze brasoc'h war rene-rien ar skolioù kentañ derez e Diwan.

Prederiet-bras eo ar skiantou-rien gant chidouarn an diaoul o virviñ dindan vor e donvor Enez-Mayotte : ur pikol menez tan e go en ur volz dindan zour. Riskloù zo e sankfe an enezenn dindan ar mor da vare ul lanv bras.

Deuet e oa pennoù bras ar Makroniezh betek Breizh da gaozeal eus sevenadur. C'hoant ganto gouzout penaos e ya en-dro ar *Pass Sevenadurel*. Ur c'hwitadenn betek-henn : ar re yaouank n'int ket niverus bras oc'h implij ar 500 euro kinniget dezho evit obererezhioù sevena-durel renablet gant ar Stad. Un abeg all a oa da zont betek Penn-ar-Bed : emañ an dilenna-degoù o tostaat ha gant se e oa brav reiñ un tamm skoazell d'an dilennidi war ar renk evit LREM.

Un toullad brav a levrioù a zo bet renablet ha burutellet gant Herve Lannuzel en e

rubrikenn *Du ha gwenn ha plas da lenn...* C'hwec'h levr evit ar vugale ha daou levr all : *Lucio e-kreiz K.* gant Annie Coz ha *Gwez ar vro* gant Padrig an Habask.

TH

**Bihan an niver a gelaouen-
noù resevet en dro-mañ !
N'ankouait ket kas deomp
ho niverennoù nevez pa
zeuont er-maez !**

Annaig KERVELLA
Tudual HUON

Annaig KERVELLA
Tudual HUON

HOR MIGNONED

Kaṇv :

Aet eo Mari Kermarec da Anaon d'an oad a 79 bloaz. Lidet 'oa bet hec'h obidoù d'ar Sadorn 9 a viz Du e iliz parrez Plougerne. Daou laz-kanañ o doa rentet enor dezhi gant kantikoù hag ur ganaouenn e brezhoneg, al lid o vezañ e galleg.

Labouret he doa Mari Kermarec e bed ar c'hleweled. Da gentañ 'oa bet stummet gant Chanig ha Charlez ar Gall, evit ar radio. Da c'houde 'oa aet war-zu ar skinwel. Kinnigerez, produerez, sevenerez... E-touez hec'h oberoù heverk e kaver *30 vloaz zo, Bretoned yaouank en Aljeri* bet skignet d'an 01/11/1992. Gwelet e oa bet evel komedianez, nevezik zo, er film-faltazi *Ar mor atav* bet sevenet gant E. Roy ha produet gant *Kalanna*. Evel komedianez c'hoariva e oa anavezet er strollad Penn-ar-Bed. Enoret 'oa bet e 2004 gant Kolier an Erminig.

Ganedigezh :

Kresket eo an dud e ti Tremeur Guillaumie ha Solène Goulaouic,
ur plac'hig Bleuenn hec'h anv a zo bet ganet d'an 2 a viz Eost e
Sant-Brieg.

PROFOÙ

Miz Eost : Michel LE ROY ; Glaodig LIABEUF-LE MAGUER ; Paul AUFFRET ; Jean-Yves LE GOFF ; R.F. CARRE ; Jean-Michel MAHE ; Yves MERVIN ; Loik CHAPEL ; Daniel DOLLE ; Drian BERNIER ; Gweltaz ADEUX ; Jean OLLIVRO ; Alan Judicael GACHET

— War un dro : 186€

Miz Gwengolo : Pierig AN DIGERC'HER ; Loic CAMPION ; Jo BERNARD ; Gilbert KEROUANTON ; Jean-Claude LE THOMAS ; Celestin ha Mari-Jo LE ROUX ; Serge AUBIN ; Ti ar Brezhoneg ; Armel LE SEC'H

— War un dro : 180€

Miz Du : Per LAVANANT ; Jean-Claude MORVAN ; Robert PERROUD ; Yann AN AOD ; Mari-Soaz AR C'HOZH ; Jeannot FLAGEUL ; Evelyne LOZAC'H ; Alain BOUVET ; Tremeur GUILLAUMIE ; Yann-Loeiz KABELL ; Gwenaël BARON ; Riwal HUON ; Jil PENNEG ; Herve AR BEG ; Gael BRIAND

— War un dro : 191€

*Mil drugarez a lavaromp ur wech ouzhpenn
d'hor skoazellerien.*

BREUDEUR MORVAN

E-kerzh fest-noz Kala-goañv UDB Pempoull o doa ar Vreudeur Morvan roet da c'houzout ne yafent mui da ganañ er festoù-noz. 88 eo Henri ha 85 Yvon. O breur François a oa aet da Anaon e 2012. Enor a zo bet graet dezho gant an holl re a oa eno. Kenderc'hel a raint da ganañ er gêr hag evit o mignoned moarvat. Ra vo plijus ha diskuishoc'h o “buhez nevez” e Sant-Nigoudenn. Bev mat e chom o 61 bloaz kan-ha-diskan !

DEIZIATAER 2020 SKOL AN EMSAV _____

Gant e liv ruz teñval e c'hello pep hini urzhiañ ha heuliañ obererezh e zevezhioù a-hed ar bloaz 2020, kuit da vezañ bepred war ur skramm.

*12€ an tamm – E gwerzh er stalioù-levrioù zo pe e : Skol an Emsav - 8 tro-lec'h Sant-Albin – 35000 Roazhon
degemer@skolanemsav.bzh*

DEIZIADUR 2020 DIWAN _____

Kinniget eo an deiziadur e liv gant Kuzul Skoazell Diwan Plougastell-Daoulaz. An arzour *Krank Du* en deus savet an tresadennoù. Diazezet eo an deiziadur war un dibab troioù-lavar. E miz Ebrel e kaver « Sklaer evel lagad an naer » da skouer.

10€ an tamm – Kavet e vez er skolioù, gant ar c'huzulioù-skoazell pe e Diwan – ZA Sant-Ernel – BP 147 – 29411 Landerne Cedex

PRIZ LEVRIERIEN PRODUET E BREIZH _____

E rann al levrioù evit ar vugale eo al levr-pladenn KAN AR BED eo a zo bet enoret d'ar Meurzh 12 a viz Du e Roazhon. 55 levrier eo o deus graet an dibab-se. Gourc'hemennoù da Arno Elegoet ha da Joris. Ur meneg ispisial o doa bet e-kerzh Gouel ar Gelted en Oriant, en hañv-mañ. Ur prof eus ar c'hentañ eo evit ar vugale hag an dud deuet kenkoulz all. Ur veaj liesliv ha liesyezh eus ar c'hwekañ.

Kan ar Bed – levr-pladenn bet embannet e 2018 – 21,90€ ar skouerenn.

BARZHAZ BIHAN GALIZA

Gant ar gelenner, troourez ha skrivagnerez María Lopo eo bet savet al levr divyezhek-mañ. Tro hor boa bet da venegiñ he levr all *Canto e contracanto. Antoloxía persoal de poetas de Breaña* en niverenn 435. Kavet e vez el levr nevez-mañ barzhonegoù un daouzek bennak a varzhed eus an XIX^{vet} hag XX^{vet} kantved, an holl anezho brudet hag a bouez-bras e istor lennegel Galiza. Tri skolveuriad o deus troet e brezhoneg an dibab gwerzennoù galizeg, Herve Bihan, Alan Botrel, ha Gwendal Denez. Ur c'henlabour a-feson a gas war treuzoù an hollved. Setu pozioù klozañ ar raklavar :

« Spi hon eus e roio hor *Barzhaz Bihan*, anvet evel-se evit dougen bri d'ar Barzaz Breiz, oberenn veur Kervarker, daouzek abeg ouzhpenn d'al lennerezed ha lennerien da genderc'hel da selaou son an delenn o tont eus ar Su. »

*Barzhaz Bihan Galiza – Mostra de poesía galega -
María Lopo – Xunta de Galicia - 2019*

DASTUM DIGOUST

Abaoe ar c'hentañ a viz Gwengolo ez eo digoust mont war diaz-titouroù Dastum (www.dastumedia.bzh). Dav memestra leuniañ ur follenn enrollañ (*formulaire d'adhésion*) ha kaout ur gont Dastum. 120 000 enrolladenn a zo ha kantadoù a zielloù a bep seurt (poltriji, pladennoù, dielloù stumm PDF). Reiñ an tu da gement den dedennet gant glad ar vro, ar sonerezh, ar c'han, ar sevenadur dre vras furchal ha dizoleiñ ur bern dielloù, setu aze pal Dastum. Dipitus un tamm ne vije ket bet aozet al lec'hienn e brezhoneg ha gallaoueg ouzhpenn ar galleg. Dont a raio moarvat.

D'ar Sadorn 26 a viz Here e oa bet roet Priz Langleiz da vare Gouel al Levrioù. Annaig Kervella eo a ginnigas Pierrette Kermoal e anv *Kuzul ar Brezhoneg* a-raok ne vefe roet ar Priz gant Gaëtan de Langlais, mab Langleiz. Setu da-heul he frezegenn :



« Ar re a zarempred Gouel al Levrioù e Karaez a anavez sur, stand *Aber* hag an hini a zo e penn : Pierrette Kermoal.

Piv eo 'mit-hu ?

N'an ket da ziskuliañ kalz a dra met degas da soñj buan-ha-buan mein-bonn zo eus he hent e bro ar brezhoneg hag al lennegezh.

'Tro 20 vloaz 'oa Pierrette Kermoal p'en em laka da zeskiñ ha da studiañ brezhoneg. Ha buan-tre e lenner pennadoù savet ganti e meur a gelaouenn : *Preder, Al Liamm, Emsav...*

E 1969 e kaver un danevell gentañ *Er Stellac'h* e niverenn 134 *Al Liamm*.

Lenn a ran deoc'h un arroudenn verr anezhi :

“Sabatuet e chomis. C’hwez ar bezhin am leunias. An aber, ledan c’hoazh el lec’h-se, a oa sioul. Gwagenn ebet, nemet ur wechig an amzer, ur roufenn skañv a floure an dour. Treuzwelus e oa an aber, ken ma tenne d’ur gorread skorn, oc’h adskediñ an oabl sklaer.

[...]

En tu all, an ti kozh a oa sklêrijennet atav. Heklev ur c'hoarzh a zeuas betek ennon, damvouget gant al lusenn disliv hag an noz o teñvalaat. Gant ar pezh a welen e skine ar vuhez.”

E-kostez un aber emañ baradoz Pierrette hag er bloaz 2000 e ro buhez d'ar gelaouenn *Aber* ha d'un ti-embann da-heul. Puilh ha liesseurt eo oberoù ar skrivagnerez.

Echuiñ a rin gant ur geriennoù diwar bluenn Pierrette :

“Al lennegezh hag ar yezh zo ar sichenn ma sav Breizh he dazont warni.

Bez' ez eus ac'hanomp keit ha ma 'z eus eus hol lennegezh, keit ha ma krouomp gant hon yezh.”

Trugarez ha deoc'h-c'hwi Priz Langleiz !

LID KOLIER AN ERMINIG 2019

D'ar Sadorn 5 a viz Here e oa bet roet Kolier an Erminig da bemp loread e sal kaer Opera Roazhon. Aozet e oa bet an abadenn gant *Skol-Uhel ar Vro* ha kaset e voe an abadenn en-dro gant Yann Chouk, kenseller an Erminig.

Setu amañ kevret anv al loreidi :

- Maripol Gouret, bet krouet KDSK ganti e kêr Gwened e 1999. Eil skourr KDSK a voe digoret e Sant-Ervlan e 2008. Ul labour hir ha start kaset da bennvat gant youl ha pennegezh.

- Stéphanie Stoll, prezidantez Diwan.

- Malo Bouëssel du Bourg, kenlabourer ar gelaouenn *Al Liamm*, skrivagner hag anavezet mat evel rener *Produet e Breizh*.

An tri kentañ bet meneget ganeomp a zo brezhonegerien ampart.

- Marianig Larc'hantec, bet desket seniñ telenn ganti da vare *Telenn Bleimor* tro ar bloavezhioù 60. Sonadegourez ha sonaozourez a-vicher eo-hi ha savet he deus ur bern skridoù-sonerezh evit an delenn geltiek.

- Paul Loret, kenlabourat a ra gant *Breizh Unvan* a-dal ar bloavezh 2000.

- Carlos Nuñez a oa bet erminiget e miz Eost da geñver Gouel Etrekeltiek an Oriant.

- D'ar re Bernard (afer an ñ !) ha d'al liseidi a stourm evit ar *Bak e brezhoneg* e voe roet medalenn *Skol-Uhel ar Vro* ha da Fañchig bihan e voe roet un *Ti-cheuc'h* skrivet « Fañch » warnañ.



DASTUMAD TROIOÙ-LAVAR AL LOENED

Ti Douar Alre ha *Kerlenn Sten Kidna* a zo o paouez embann un dastumad troioù-lavar bet dastumet war zouar Alre gant Patrick Drean en-dro tem al loened : *De loen en large, recueil d'expressions populaires bretonnes collectées dans le Pays d'Auray*. Skeuden-naouet eo al levr gant Olivier Berson. 8 € e koust al levr.

Ti douar Alre

02 97 78 41 40

www.tidouaralre.com

PRIZ AEB (ASSOCIATION DES ECRIVAINS DE BRETAGNE) _____

D'ar Sadorn 9 a viz Du e oa bet bodet *Unvaniezh Skrivagnerien Breizh* e Sant-Yowan-an-Havreg (Saint-Jouan-des-Guérets). Ar priz kentañ evit al levrioù e brezhoneg a zo aet gant Jerom Olivry evit e levr *Ouzh skleur an noz*, embannet gant *Al Liamm* e 2018. An eil priz a oa bet roet da Yann-Bêr Kemener evit e levr *Penaos eo marvet Yann Pilhaouer*, embannet gant *Skol Vreizh*. An trede priz a oa bet roet da Erwan Evenou evit *Bugale milliget ar baradoz kollet* embannet gant *Al Liamm* ivez.

KATALOG NEDELEG KUZUL AR BREZHONEG _____

Evel bep bloaz e c'hallit adkavout al levrioù nevez embannet e-kerzh ar bloaz gant an holl diez-embann ezel eus Kuzul ar Brezhoneg war gatalog Nedeleg. Levrioù marc'had-mat a c'hallit urzhiañ ivez.

Evit pellgargañ ar follenn-urzhiañ : <http://www.brezhoneg.org/br/blog/katalog-nedeleg-2019>